

1/ JYM 25

<sup>Distro an den a arme.</sup>  
Ar mag he daou bried.

1.  
 E noz kenta va eured,  
 Tirony la la, la la la.  
 E noz kenta va eured,  
 Me am boe kommandant !

2  
 Da vont da gervic'ha 'r roue,  
 Ha me rentet kontant.

3  
 Nemet va Juliana,  
 Ne rae nemet gouela.

4  
 Gavit, va Juliana,  
 Gavit, na ouelit ket.

5  
 Na da benn seiz miz ama  
 Me a vo retournet.

6  
 Mes ar champagn hoant, se  
 Seiz vloaz a 'zo padet.

7  
 Distro an den a arme,  
 Kenta 'en deus rankontret.

8  
 A voe e Juliana  
 A oa o vont da eureuji.

9  
 Meuz e'z a da c'houlenn loja  
 Ebarz en ostaleri.

10  
 O den brao eus an arme,  
 C'houi ne viot ket lojet.

11  
 rak an ti 'zo occupet  
 gant an dud a eured.

2

12

E vamin gaer en deus gwelet  
outi'n deus goulennet

13

O den brao eus an arme,  
c'houi a vezo lojet.

14

Digasit ho malisenn  
Hoc'h aour hag hoc'h arc'hant.

15

Nañ ouz taol an eured,  
c'houi a leino kontant.

16

Nañ en eur gwelle a blun  
ez efot da gousket.

17.

Hag eur marchosi kaer,  
da lakat ho roused

18

Distro an dud eus an eured,  
Me ~~ho ped~~ da azeza.  
zo pedet

19

Na me z a da azeza  
Costik da Juliana.

20

Na ha voe debret lein,  
lavaret ar grasou!

21

Hag an denig a arme  
en deves goulennet

22

E pelec'h ema ar c'hartou,  
ar c'hartou hag an disou.

23

Evit ma vezo gwelet  
na da biou e tigouezo



3

24  
Ma da brou e tigouezo  
ar plac'h eus an eured.

25  
O den bras eus an arme  
ouzo'h ne aparchant tiel.

26  
Mak hen sevel en e yar  
Ha trei ouz e Juliana.

27  
Relech emañ mouchoerou.  
Hag an diamanchoù.

28  
Am boa me d'ev'h c'houi roet  
keman iz eus reiz vloaz kremenel

29  
Relech emañ ar zeizenn  
Hag ar walenn ar c'hant.

30  
am boa me d'ev'h c'houi roet  
ouz taol ar za hramant.

31  
Hag hi sevel en he ser  
Ha kammans da Grial

32  
O! gwerchez gloriüs Vari,  
Rouanez an Dreinded.

33  
Me 'zonje san intañvez  
Hag em eus doue bued.

34  
Gant va denig a arme  
Me a yelo bepred.

35  
Hag egile a yelo  
d'al lech ma iz eo deuet.